

# KANTIK DA ZANT SANÉ

Var don : *Guir vugale ar Verc'hes.*

## I

Brema 'zo pemzek kant vloaz, eun avel fulorest  
A zirollas d'he flastra, var gouen ar Vretoned  
Gwalgasset gant ar Zaozon, diouz taoliou ar vrezel  
Hon tadou koz a dec'has pell euz bro ho c'haveL.

## II

Neuze eun eskop brudet, gantan menec'h santel  
'Zavas euz an Iverzon, 'vit dont da Vreiz-Izel.  
An Eles a gomezas tarziou kriz Loumaze  
Dindan staon ar vag zister a zouge sant Sané.

## III

Eun denvalijen euzus a boueze var hor Breiz !  
Gwassoc'h eget ar gurun, gwassoc'h eget ar bleiz,  
A gas e youc'hadennou 'trezek ar c'hoajou doun,  
Spount doueou faoz Satan et waske peb kaloun.

## IV

'Vel ma tec'h an noz tenval pa darz an eol skedus,  
Dindan galloud sant Sané an diaoul a dec'h mezus.  
Hag, hep dale, eun Ilis 'zo savet d'hor Zalver  
El leac'h ma rede ar goad euz mean ruz an Loter.

## V

Mes piou lavaro ar boan ho deuz bet gouzanvet  
Sant Sané hag e venec'h er vro ho deuz savet,  
Pa ieas er vech kenta ar zoc'h gant an ero  
'Bars an douar na zouge nemet koajou dero.

## VI

Eur c'hloastr neuze oa savet demdost d'eur feunteun skler,  
Hag epad an nosvezioù, varzu tron ar C'hrouer  
Euz an eost o sourral 'zave eur veuleudi  
Luskellet gant kantikou ar venec'h o pedi.

## VII

Ar bai Janet reuzeudik a glev an Aviel,  
Ha divar ho zal stouet a red an dour santel,



Satan a zo dilezet : e parrez sant Sané  
N'euz mui nemed kristenien a bugale Doue.

VIII

Euz tro dro, an dud doaniet, o kleout euz e vrud  
A zeue daved Sané, 'neur c'houlen eur burzud  
Eharz kroaz ar Minihiy, an torfetour soken  
A gave gant ar pardoun frealzder de anken.

IX

Mes evel eur mestr a c'halv e zervicher d'an noz  
Jesus a c'halvas Sané da gemer e repos.  
Evit guelet e vreudeur, eur vech araok mervel  
Ar Zant 'vit an Iverzon a lezas Breiz-Izel.

X

Abaoue Sané a doll, euz an nenvou eürus,  
Var bugale e barrez eur zell trugarezus.  
Ar grassou a skuil varnomp zo breman founnusoc'h  
Eget an dour a dennas gant e vaz euz ar roc'h.

XI

Tud Plouzane goulennomp dirak hor sant Patron,  
Na zeuo ket ar pec'het da zaotri hor c'halon,  
'Vel ma heuilhomp e roudou pa reomp e dromeni,  
Heuilhomp ivez al lezen a oa deut d'hon deski.

XII

Hon douar 'zo douar sakr, trempet eo gant c'huezen  
Ar sant braz a zigassas aman ar sklerijen.  
Teir gwech malloz d'an trubard a c'hell ankounac'hat  
E zomp bugale ar Zent, hag 'teufe d'ho nac'hat.

XIII

O sant Sané benniget diouz peb drouk hag anken  
Diouallit ho pugale : selaouit ho feden.  
Mirit stard 'n'ho c'halonou feiz krenv ho zadou coz,  
Betek ma deuo an deiz da vont d'ar baradoz.

Imprimatur :

*Corisopiti, die 9 Junii 1911.*

**A. GADON,**

VIC. GÉN.